

PARDON KOLLOREG

An deiz all me a oa bet ba pardon Kolloreg
Me 'm eus gweled ma mestrez war skalier ar vezred

Evid mont d'he saludi na ken kaer 'vel ma oa hi
Me a houlas aiganti na dimezed a oa hi

N'oñked c'hoaz, ma servijer, n'oñked c'hoaz dimezed,
Med bed oñ eur fortun vad d'an hini am c'hemerfe

Me 'm eus ba'gar e ti ma zad pewart garr houarned
Ha kezeg er marchosi kapabl d'ho charread

Me pa oant erru eno me na welen netra
'med eur c'hoz kaz bian fall ne oaked 'vid logota

*
Daou wele a oa ivez, unan neb tu d'an tar
Al liñseniou 'oa warne oaïnt ked dezuz ar re voan

Al liñseniou 'oa warne oaïnt ked dezuz ar re fin
Nozvez kentan 'm eus kousket 'meus kigned ma daoulin

Breman me chañcho micher, hayo da wiader
Ha lakeo war ma gwele liñseniou lien ker

Ha lakeo war ma gwele liñseniou lien fin
Ha pa 'hiñ me da gousked kigniñ ked ma daoulin

*
*Daou vloach a oa eno, unan eb tu d'an tar
Azezet war ho reor, o c'hoaz da c'houll digor*

Pardon koloreg

An deiz all me ' oa bet e pardon Koloreg
Me 'm oa gwelet ma mestrez war skalier ar vered

Me ' c'honet d'he saludi na ken kaer 'vel ma oa
Me a c'houles diganti na dime'et a oa

N'on ket c'hwazh ma servijer, n'on ket c'hwazh dimezet
Met me ' rei ur fortun vat d'an hi' ma c'hemerfe

Me meus dumañ ' ti ma zad pevar garr houarnet
Ha kezeg er marchosi kapabl d'o chareat

Met pa oan erru enne me na welen netra
Met ur c'hozh kazh bihan vall ' oa ket 'vit logota

Div gozh viorc'h a oa ivez unan 'ne pep tu d'ar c'hraou
Ret ' vije boutañ war o reor 'vit mont dreist an treujoù

Daou wele a oa ivez un' ane pep tu d'an tan
An liñselioù ' oa warne ' oant ket deus ar re voan

An liñselioù ' oa warne ' oant ket deus ar re fin
' Nozvezh kentañ 'm oa kousket 'm oa kignet ma daoulin

Bremañ me ' cheñcho micher ' aio da wiader
Ha ' lakin war ma gwele un liñselioù lian kaer

Ha ' lakin war ma gwele un liñselioù lian fin
Na pa c'hin-me da gousket ' gignin ket ken ma daoulin.